



Bleun-Brug

Avez-vous payé votre Abonnement ?

Beaucoup de nos lecteurs nous sont encore redevables de la totalité de leur abonnement 1952. Ils recevront donc ce mois-ci, un mandat-recouvrement de **500 francs** (frais en sus).

Nos amis comprendront que refuser de le payer serait nous causer un tort considérable et manquer à la plus stricte justice.

TAOLENN

Breudeur ni glev ho klemmou	1
Dalc'homp soñj	2
Gouel Nedeleg Alanig	4
Eun nozvez iskis	6
Luskell va bag (kanaouenn)	7
Penaos e savas trouz etre daou bried	8
Labousig ar goañv	10
N'eus ket brasoc'h karantez	11
Ar pevar leon hag an Tad gwenn	13
Boked Bleun-Brug Landreger	14
Himnou an Iliz	16



Breudeur ni glev ho klemmou

EUR gelaouen gristen, evel hon hini, ne c'hell ket tevel ar c'heleier mantrus a deu d'eomp eus pevar c'horn ar Chin. Ar Chin, bro divent ha burzudus !

Dirazi eo e varve, pevar c'hant vloaz a zo, en deiziou-man, Patron glorius Breuriez ar Feiz, **Sant Fransez Xavier**, dinerzet gant e labourou abostolik, devet e galon gant tan karantez Doue hag an eneou...

E bro all ebet eus ar bed, Breuriez ar Feiz ha Sant Fransez Xavier n'ez int muioc'h karet eget e Breiz, douar ar zent koz met ive douar ar visionerien kalonek.

Hentchou ar Chin roudennet int bet gant treid benniget misionerien eus hor bro d'eomp-ni.

War an had taolèt ganto, ha gant eleiz a visionerien all, eun eost kaer a zareve. Korniadou a-bez a oa gounezet d'ar gwir feiz. Tamm ha tamm heol skedus an Aviel, an heol-se, ne vez morse mantellet gant an noz, a save a-us d'ar vro a-béz.

Ha padal, pa zeblante da bep tra mont war ardo, gant freuz difreuz ar brezel, an hini a zo, abaoe penn kenta ar bed, o klask freuza labour Doue, an enebour a zo deuet.

Deuet eo da c'hoeza e kalonou mistri nevez ar Chin eur gounnar ifern a-enep ar gristenien. Ma ne lavarer ket, evel gwechall : ar gristenien d'ar maro, e rer, e gwirionez, ar pezh ma c'heller evit o distaga diouz an Iliz.

« Skrivet eo, me a skoio war ar pastor hag an denved a yelo du-man, du-hont. »

War an eskibien da genta ha war ar veleien hag al leanezed eo o deus skoet mistri diaoulek ar Chin.

Ar re man a zo bet tamallet e gaou, toulbac'het, bourrevet, lazet, lod aneza, stlapet er-mêz eus ar vro, evel torfetourien.

Breman eo deuet tro an dud fidel, ar yaouankizou hag ar vugale.

Skrija rer o klevet komz eus ar yudazerezh graet d'ezo evit o lakaat da nac'h o feiz.

Lea'h a oa da gredi, pa vije astennet an deskadurezh, an dud a vije deuet ive da wellaat. Siouaz, pa ne vez doujans Doue ebet en o c'halon, int gwasoc'h eget an anevaled gouez.

Ar pezh a zo bet gwelet epad ar brezel diweza hag ar pezh a weler bemdez ober hirio d'ar gristenien e kement all a vroioù hen diskouez sklêr hag anat.

Unan eus an traoù a ra kalz poan d'ar visionerien, argaset eus o misionou, eo gwelet pegen dibreder e vevomp-ni aman ha pegen yen e chomomp dirak trubuilhou hor breudeur, gwasket en o c'horf hag en e ene.

Kristenien ar Chin ha kreiz an Europ a c'houzanv hag a varv evit Hor Salver Jezuz Krist ha ni a zo aman laosk ha lezirek en e servich.

Petra dalv eta hor feiz ha petra c'hortozomp evit lakaat urz vat ha muioc'h a lealded en hor buhez ?

Mard'eo gwir e c'hell pep ene hag a boagn d'en em sevel war-zu Doue dibrada ar bed d'e heul, petra ne c'hellfemp ket ober, ni, evit

skoazella hor breudeur reuzeudik, evit prena d'ezo nêrz kalon ha frankiz ?

Gant goueliou Nedeleg o font, ra ziskennno pep hini ennan e unan.

Arabat eo sponta, bagig Sant Per a zo bet strinket ha distrinket, meur a wech, abenn breman, hep pensea morse, ha n'eo ket en taol-man c'hoaz, da vihana, eo e veza goueledet.

Evelato arabat eo kredi e pado ar Feiz hep beza diwallet hag harpet ; da bep hini eo beza start hag evesiant warnan e unan ha digor e galon war boaniou e nesa.

L. B.



DALC'HOMP SONJ

« Mont a rae a-hed an ero, hag en eür leñva e taole an had. »

Pa welan ar Bleun-Brug o vleunia dre holl, n'hellan ket en em virout da zoñjal en Aotrou Yann-Vari Perrot, an hader kalonek a gousk du-hont, e bro ar brug, e gousk diweza, dindan eur groazig koat hepken.

Ya, eun dever a lealded hag a anaoudegez-vat eo d'eomp, ni hag a zo oc'h eosti diboan e-kreiz al levenez, derc'hel soñj en hini ma tleomp d'ezañ an eost-se, en hini en deus hadet e kreiz ar boan hag an daelou hag a zo aet, evit ma tougo frouez e labour, betek ar sakrifis brasa a c'hell eun den ober er bed-mañ : ar sakrifis eus e vuhez.

...

Nao bloaz a zo abaoe ! Nao bloaz ma heuilhen ar beleg santel, betek al lec'h m'eo astennet hirio e gorf paour, en draoniennig c'hlas, e-kreiz ar gouezeri, e skeud chapel Itron Varia Goat-Keo, bet adsavet gantañ.

Kañv ha glac'hâr a oa neuze dre-holl. Mantell zu miz Kerzu gant e goumoul teñval hag e nozvezioù hir a c'holoe an douar. Mantell ruz-gwad ar brezel a stlabeze ar bed holl gant reuz e dorfejou euzus.

Krabanou an enkreiz a waske hor c'halonou dibaouez ha didruez.

Hag ez aemp d'e heul eur wech c'hoaz, ni e ziskibien, ar wech diweza.

Gwelet hon eus an arched, e arched, e tiskenn er bez yen hag an douar o ruilh warnañ...

E four ar chapel an tri gloc'hig : Ronan, Divi, Gwennael, a zone klemmus d'o zad, ha diwar hor muzellou-ni e tarze ar bedenn.

War-zu ar Werc'hez Vari, Itron Varia Goat-Keo, e save hor pedennou, c'houek ha doanous :

« Gwerc'hez leun a druez, digemerit en ho Paradoz ho servicher mat en deus ho karet kement m'eo fellet gantañ diskuiza amañ e gorf brevet gant la labour, da c'hortoz deiz ar dihun peurbadus.

« Leun eo bet e vuhez, leun a labour, a boan, a c'hlaç'hâr.

« Eeun eo bet e vuhez, eeun evel eun tenn.

« Didroidell eo bet e vuhez, didroidell evel buhez an durzunell a gane bep bloaz d'ar gorreou, amañ, deiz ar pardon.

« Santel eo bet e vuhez, santel ha kalet evel buhez ar Sent koz en deus kement karet.

« Kriz eo bet e varo, kriz evel maro ar C'hrist war Menez Kalvar... »

...

Nao bloaz a zo abaoe, nao bloaz bet abaoe an 12 a viz Kerzu, deiz gouel Sant Kaourintin.

Nao bloaz ma koueze ar stourmer e-kreiz an hent, treuzet d'ezañ e benn, ha den war e dro nemet ar paour-kaez kurust trafilhet.

Nao bloaz ! hag abaoe emañ aze dilufr, dic'hloar, dindan ar bernig douar-se, warnañ eun dornadig brug hag eur groazig paour.

Nao bloaz ma kousk aze, keñver-ha-keñver gant an Ao. Jegou, ar beleg all bet lazet evelañ, gant tud didruez.

Ha setu, o planedenn souezus ! oferenn Sant Korantin eo bet, e Skrignag, e oferenn genta, hag oferenn Sant Korantin eo bet e oferenn ziweza.

Aet oun bet, araok Bleun-Brug Landreger, Bleun-Brug Sant Erwan, betek bez ar Stourmer.

Aet oun bet, gant doujañs ha karantez da bere'hirina da chapel Koat-Keo. War bez paour an Aotrou Perrot, pedet em eus. Pedet em eus an daelou em daoulagad.

Pedet em eus, ha selaouet ivez. Hag eus goueled ar bez yen, e vouez a gomze d'in. Hag e lavare evel ma lavare d'in deiz pardon Koad-Keo 1943, e-doug gorreou an oferenn-bred :

« Ne glevet ket ! An durzunell o kana er gwez ! »

Hag e kane neuze an durzunell m'oa eun drugar...

Met hirio, kaer am eus selaou, ne glevan netra.

Mut eo an durzunell, mut an draonienn, mut an tri gloc'hig...

Met em c'halon hag em spered e tiwan splann eñvor ar beleg santel, e skouerioù a garantez, e gentelioù entanet, e sell lugernus... hag e viz astennet o tiskouez d'in an hent « eeun evel eun tenn... »

Komprenet em eus. Sevel a ran, frealzet ha kreñv. Ha dre ma krapañ gant an hent a gas diouz Koat-Keo, emañ an heol laouen o para a-us d'in, al labour-sed o kana er girzier... An durzunell ne gan ket c'hoaz, met kana a raio... An tri gloc'hig ivez, a zihuno, ha gant o mouezioù skintin e tregerno adarre an draonienn didrouz.

Korf ar Stourmer a zo aze dindan an ero. N'eo ket maro. Kousket eo hepken ! E spered avat a zo dihun mat, ha beva a ra muioc'h eget biskoaz e kalon ar Bleun-Brug.

V. SEITE.



EVIDOC'H LENNERIEN

Emaomp e kreiz ar goanv, hag amzer n'eus fors pegement da lenn. Kemerit tro evit skigna Bleun-Brug en-dro d'eoc'h.

N'eus mui nemetan, koulz lavaret, o lakaat e lennerien da garga war eun dro ar brezoneg hag ar feiz.

Ne vezit ket lennerien hepken. Kemerit ive ho pluenn, beb an amzer, ha savit evit Bleun-Brug skridoù plijus ha skridoù beo.

Klemm a rit eo divlas ar gelaouenn, ha ne rit netra evit lakaat buhez ha saour enni :

« Eman hor brezoneg o vervel
Dihunit paotred, dihunit. »

Gouel Nedeleg Alanig

ALANIG a zo emzivad. N'en deus mui nag e dad nag e vamm. O c'holllet en deus ez vihanik. Degemeret eo bet gant e vamm goz, a zo o chom en eun tiig dister, war lezenn koad al louarn. Evit o maga o daou n'eus nemet eun tammig leve-treüt chomet war lerc'h tud gaez Alanig. Ur vuoc'h vat he deus avat ar vamm-goz, hag e tale'h dezi evel d'eun teñzor. Ha labour Alanig, pa ne vez ket er skol, a vez kas ar Rozenn da beuri. Neuze, pa zistro d'ar gêr, e vrasa plijadur a vez klevout meuleudiou e vamm goz : « Ha, va mabig, peuri ra ar Rozenn ganez ».

Ar goañv a zo deut, evel pep goañv yen na garo, gantañ skeud an Ankou e pleg e vantell... Abaoe eun nebeut sizunvezioù, ar vamm goz a zo astennet war he gwele : taget e oa bet gant ar riou, eun devez ma oa bet paket gant ar glao pa oa o tastum keuneud sec'h evit he zammig tan. Alanig, gwasket gant ar glac'har, a veilh war e vamm goz ar gwella ma c'hell. Bep an amzer e teu eun amezeg, Anna Wilhou, eus a Gerroc'h, da gempenn an ti ha da glask keloù an hini goz. Houmañ ne da ket war wellaat. Gwanaat a ra buan end-eeun, a zeiz da zeiz...

Eun abardaez, an amzer a zo bet goloet trumm gant koumoul du ha pounner miz Kerzu ; hag an avel he deus kroget da c'houeza ha da sarac'ha e gwez pin ar c'hoad. Mamm goz Alanig a zo gwall druezus ar stad anezi emberr : ne baouez ket a grena, hag a glemm gant ar riou hag ar boan. He daoulagad a zo aet peurziflamm-ha mouk.

Goude koan evelato e c'houlenn digant Alanig kemerout eun eteo d'hel lakaat war an oaled. « Va mab bihan-me, emezi, warc'hoaz emañ gouel Nedeleg, gouel laouen ganedigez hor Zalver. Mont a ran war va zremenvan, her santout a ran. Te a bedo ar Mabig Jezuz evidon. » Difronkal a ra Alanig...

Beilhadenn derc'hent Nedeleg a dremen evelse en doan hag en dristedigez. Dre spered an hini goz e tremen soñj an holl c'houeliou Nedeleg eurus he deus gwelet e-doug he buhez. Daerou a ruilh war he jodou roufennek. Rei a ra he gourc'hemennou diweza d'ar paotrig : « Mont a ri da gaout da eotr Paol da Gêr-Lagadek ; kalon vat en deus, ha da zegemer a ray. Heñ a zesko dit labour ar c'hovel, pa vi brasoc'h... Va mabig bihan-me, chom fur ha bez eur c'hristen mat. Va mabig... ». Hag Alanig o c'houzañv sioulik e c'hloaz, beuzet e zaoulagad.

Ha setu ma ne gomz mui ar goz. Ne respont ket da Lanig, pa lavar-heñ dezhi : « Mamm goz, chomit ganen, arabat mervel ». Alanig a sell outi gant enkrez : e vamm goz ne fiñv mui ; he dremm a zo distennet ha sederaet, klozet he malvennou ; seblantout a ra mine'hoarzin.

Ar c'houlaouenn, hag a lugern war-c'horre an daol, a zaskren. Emañ o vont da vouga...

A-greiz-holl, douget gant an avel, fraoñv ar c'hleier a zeu betek diskouarn Alanig. Setu brimbalerez hanternoz, an oefrenn a zo o vont da gregi. Ar paotrig a sec'h e zaelou, a daol eur sell all ouz e vamm goz : « Ez an da c'houlenn digant ar Mabig Jezuz da barea, pe va c'has ganez ».

Hag heñ er-maez, er c'horwent yen, tre ma n'eo mui beilhet e vamm goz nemet gant ar c'houlaouenn o vervel hag an elfennoù o tañsal war an oaled. Mont a ra tre ebarz ar c'hoad, rak dav eo treuzi ar c'hoad a-benn mont d'ar vourc'h. Hag Alanig a fell dezañ gwelout ar Mabig Jezuz. Un nozvez all en dije bet aon, met en nozvez-man n'eus ennañ nemet glac'har, ha fiziañs evel-kent. Klavout a ra ki Kerrroc'h o harzal en diabell.

Mont a ra Alanig dre an noz teñval, dindan hiboud ar gwez dibourc'h gweet gant ar barradou avel. Padal, degouezout a ra a-benn d'eur c'hleuziad strouez : aet eo kuit diwar ar wenojenn, hep gouzout dezañ. Adkavout an hent dre an deñvalijenn a zo n'eo ket eun dra aes. Ha penfollet, setu ma red Alanig amañ hag ahont, a-gleiz hag a-zehou. Poan gollet. N'eo ket evit kavout ar wenojenn en dro. Aet eo faez gant ar skuizder, ha poan en deus en e zaouarn krabiset gant an drez. Hag e krog da leñva.

Daskrena a ra bremañ gant ar riou hag ar spont. Skuiz-divi ma 'z eo, e kouez war an deliou maro a c'holo an douar. Da vat, ar riou a zo kroget gant e holl izili kropet... Santout a ra e gorf evel ur maen skorn!..

An avel a zo sioulaet. Diouz an neñv tuzumek e kouez malzennoù erc'h, goustadik skañv, troidellus, evel pluennou gwenn. Hiniennou a zeu, o tiniñ, da floura dremm ar paotr bihan, hag a deuz prim ouz e zioujod, evel huñvreou tec'hus e yaouankiz...

Er pelder, ar c'hleier a vrimbal, drant ha laouen. Met Alanig ne fiñv mui. Eul liñsel erc'h kahn a c'holo e gorf a nebeudou. Ar malzennoù ne deuzout ken ouz e zioujod...

Ha setu ma seblant da Alanig gwelout dirazañ un tamm sklerijenn. Ya, sur eo bremañ. Aze, nepell dioutañ, e-kleuz eur roc'h goulaoennet piz, eur gweleig plouz a zo warnañ eur bugel nevez ganet. Stouet war ar bugel emañ e vamm, o sellout outan gant karantez.

Alanig a zianavez gant dudi ar Mabig Jezuz hag e vamm ar Werc'hez Vari, hag en tu all d'ar Mabig Jezuz, Sant Jozef, heñvel m'en doa o gwelet e kraou an iliz, bloaz 'zo, da Nedeleg. Sed, o souez evurus, m'emañ aze ivez e-kichen ar Mabig Jezuz... na pioù 'ta ? Mamm goz Alanig, seder ha beo- buhezek.

Ha setu, ar vamm goz he deus gwelet he mab bihan. Goulenn a ra aotre raktal digant ar Werc'hez Vari d'e zegas en o c'hichen. Ar Werc'hez, o soublañ he fenn, gant eur mine'hoarz, a asant.

Hag Alanig, divent e levenez, a adkavas er baradoz en nozvez-se ar Mabig Jezuz hag e vamm goz.

L. Bothorel (16-12-47).



Gwelloc'h ijin eget nerz.

Evit paka louarn pe c'had
eo ret sevel mintin mat.

Neb a zo lemm e deod
a die beza kalet e skouarn.


Da eun den fall rei meuleudi,
ouz ar re vad 'zo strinka pri.

EUN NOZVEZ ISKIS

Daou vignon, o veaji, a erruas eun abardaez en eur gêriadenn a vro-Gembre. Nozi a rae, ha setu ma oa ret d'ezo klask repu evit tremen an noz. Mont a rejont d'eun ostaleri. Eno e kemerjont o c'hoant a-gevret gant eun nebeut beajourien all. Plijadur o devoe gant ar re-mañ, pep hini o konta marvailhou hag istoriou fentus, hag hir e padas an nozveziad laouen-se.

Pa voe poent d'ezo mont da gouskat, an daou gamarad a oa dreo awalc'h. Kouskat a rafent er memes kambr, e pep a wele. An ostiz a roas d'ezo eur c'houlouenn-goar (ne oa ket c'hoaz elektrisite d'ar mare ma c'hoarvez kement-mañ), hag e pignjont da gavout o c'hambr.

Pa en em gavjont enni, ar c'houlouenn a stokas ouz ar voger hag en em vougas. Ret e voe d'ezo en em ziwiska ha klask o gwele en deñvalijenn.



Met, e-lec'h mont pep hini en e wele, evel ma kredent ober, e pignjont o-daou er memes hini, hep gouzout d'ezo, unan dre ar penn mat, egile dre draoñ ar gwele, e dreid war ar penn-wele.

Eur pennadig, ne voe trouz ebet.

Neuze e lavaras Tom, unan anezo, d'e geneil :

— Job !

— Petra 'zo, Tom ? a c'houlennas eus ar penn all d'ar wele mouez Job.

— Ma ! unan bennak a zo em gwele, a lavaras Tom. E

dreid a zo war va fenn-wele.

— Iskiz eo ! a elgerias egile. Me 'zo sur ez eus eun den em gwele ivez.

— Petra 'raimp neuze ? a c'houlennas Tom.

— Feiz avat, eme Job, me 'zo 'vont da deurel henmañ d'an traoñ.

— Me ivez, a lavaras Tom, kalonek.

Eur c'hrogad berr a voe, ha trouz pounner daou gorf o koueza war ar solier.

Eur vouez glac'haret a c'halvas :

— He, Tom !

— Petra ?

— Deuet oc'h a-benn ?

— Allas, an den all eo en deus va zaolet d'an douar.

— Ma, va hini ivez en deus gounezet warnon. Ne don ket tost da zistrei d'an ostaleri milliget-mañ.

— Na me kennebeut.

Goude eur pennad furchal :

— Job ! eme Tom, kavet em eus va gwele goull, bremañ.

— Ha me ivez, a lavaras Job. 'Michañs e c'hellimp kouskat e peoc'h bremañ.

D'ar beure, pa zihunjont, ha pa weljont e gwirionez penaos e oa bet c'hoarvezet an traoù, an daou geneil a c'hoarzas o gwalc'h.


Hag, e-pad pell amzer goude-se, pa zegouezent gant mignoned, ne voe kont ganto nemet eus o abadenn farsus.

Hervez JEROME K. JEROME (Tr. L. BOTREL).

LUSKELL, VA BAG

Kanaouenn pesketaerien a Vro-Skos

War don : The Skye Boat Song.



I

Adal ar beure, betek an noz,
Pesketa eo va lod.
Kuitaet em eus va ziig kloz
Kluchet e-tal an aod.

II

Arne 'oa bet, gleb-teil e oan,
Kounnaret 'oa ar mar.
Se ne ra mann, ret eo kaout poan,
Trec'h omp d'an avel-vor !

DISKAN

Luskell, va bag, war gri-bell (1) an dour,
Luskell, va bag, ha red !
Kaset war-raok en aveliou flour,
Sent ouz ar stur bepred !

III

Breman eo brao, seder ez on ;
Gwenn-erc'h e nij ar spoum.
Beg lemm va bag a skej an donn,
Kaset omp dreist ar c'houmm.

(Diskan)

IV

Kent pell 'vo aet an heol da guz ;
Pesket e-leiz am eus.
Tro-war-dra d'in, bezinou druz,
Va bag o zrouc'h hep freuz.

(Diskan)

(1) PE : War c'horre.

Penaos e savas trouz etre daou bried



Yannig ha Janig a zo daou bried yaouank, tomm bero o c'halon an eil evit egile. Tri miz zo abaoe m'int aet asamblez ha betek-hen n'euz ket deuet c'hoaz koumoulenn ebet da denvalaat o deizioù laquen.

Met eurusted an dud, a leverer d'eomp, a zo great gant eun neudennig, eas da derri... Emaomp o vont da lakaat dirak ho taoulagad, ha da ziskouez d'eoc'h diwar goust petra e torras an neudenn a rea eurusted Yannig ha Janig.

Deomp da genta, mar kirit, d'ar park, e lec'h m'emaint o daou o c'houtennat o zachenn karottez. Uhe-laet'ra an heol, fostaat a ra poent merenn. Meur a gorn-boud o deus roet da glevet dija eo prest ar yod en tiegezioù diwar-dro. Met Yannig ha Janig a labour atao ken a ziaoul. Ar marvailhou a zo ganto, moarvat, eo a vir outo da gaout hir o amzer.

Koulskoude, dreist ar mare, setu Janig o sevel en he za. Pres a zo Yannig. Met selaouit :

- Da beleac'h emaut o vont Janig ?
- Da aoza merenn, pase poent eo, va dousig !
- Hola, abred eo c'hoaz !
- Abred ? Ne ouezez ket pegement a labour a zo oc'h aoza eur pred.
- Ne ouezan ket (rust e vouez) koulz ha te avat bemdez ; en eur c'hard' eur eman ar zoubenn ganen var an daol.
- En eur c'hard' eur ! te, va hini koz, a raio soubenn en eur c'hard' eur ?
- Ya, en eur c'hard' eur, pa lavaran ?
- Mat, kentaze, kea d'ar gear neuze ? Ma garfe gwelet ac'hanout oc'h aoza merenn, eur wech !
- Diouztu ez an d'ar gear hag a-benn eur c'hard' eur aman e c'helli dont da glask da bred.
- Gra farz ha laka eun tamm kig moc'h er zoubenn.
- Ya, ya, ober a rin.
- Laka frankig er pod, avat, evit ma chomo peadra da domma a-benn koan. Ententet eo ?
- Lakaat frankig !!! Ober a rin... Ya, ya !

Heuliomp, breman Yannig. Kerkent en em gavet er gear, ec'h en em ro a-zevri d'al labour. Tennet en deuz e zae. Mont a ra da gerc'hat eun ordenn geuneud... Setu hen o lakaat dour er pod hag ar pod var an trebez. Eun torchad kolo ha tan er chiminal... Breman ez a da baka ar bleud hag al leaz evit ober farz... N'eo ket bero c'hoaz an dour hag eman ar zac'had farz war e benn er pod. An tamm kig ne zale ket da vont war e lerc'h... Met, petra c'hoari gant Yannig... O skrabat e benn eman hag o varmoti eun dra benag etre e zent... Kaozeal a ra outan e-unan... Nec'het eo... Sellet a ra ouz e gi bihan a vez atao harp ouz e zeulioù dra ma z'a... Hola ! Hola ! Petra eman o vont da ober d'ar c'hi-paour ? Eman krog e divesker adrenv an anenvalig, hag o steki e benn

ouz an oaled. Oh ! ar chavaj met petra a c'hoari gantan ? Plouf ! La ! Setu ar paourkez ki war e benn en dour zomm. Truez ! Truez !... Yann, Yann, selaouta, paotr, ne ouezez ket e zeus eul lezenn hag a zifenn merzeria an anevaled ??? Kerkoulz kaozeal ouz eur voger, ne ra van ebet... Met planta ra muioc'h mui a geuneud en tan... Klevet a ran ar pod o virvi, gwasoc'h eget pod al laeron, ha Yann a ziver an dour dioutan, evel ma vije o kas kolo e miz Eost...

Eur c'hard' eur, ententit, a base buan. Bep an amzer e welan Yann o sellet a-gorn war-zu aman. An ear en deus da gaout aon-da welet e wregig o tifourcha... Chut... Setu hi o tont, gwall du he zal... Bremaik eo sur an arne da strakal...

Chomomp peoc'h :

— Deuet dija da glask da verenn, met a-vec'h ma peus roet amzer d'in da c'houeza an tan.

— Hel lavaret am oa dit ne vije ket prest ar zoubenn ganez. Petra' peus great abaoe m'out deuet d'ar gear ?

— Labourat... Labourat... Eman dioc'htu poaz an traou. Kea ouz an daol pa giri, ma vezi servichet.

— Ouz taol sur-ez in. Anat d'it n'emaon ket o vont da rei an dorn d'it. Gra da geusteurenn da-unan p'out komañset.

Setu Janig ouz an daol... Ha Yann krog er soubenneg. O vont da drempa ar zoubenn eman. Met allas, ar c'heaz den, Frankig a zo leun ar pod gantan. Klevit anezhan o tampesti :

— Boul'hurun, tenna rankan Frankig da genta.

— Tenna Frankig, va Doue. Petra lavar heman ?

Janig ne gompren netra er pezh a zo c'hoarvezet. Evit Yann a zo oc'h en em zifreta muia ma c'hell. Eur fourchetez gantan e peb dourn ez a warzu ar pod. Met eun ezenn deo spoutus a zav diwar ar zoubenn vero hag a vir outan da velet korf Frankig. Bec'h a zo... A-benn ar fin setu sanket ar fourchetez en eun tu bennak, evit doare, rak setu o tont er meaz eur c'hi penn-kil-ha-troad... Frankig eo...

Janig epad an amzer-ze ne oar ket petra da ober, pe c'hoarzin, pe lenva. Strafulhet neat eo, ha rus eo e fenn evel eur c'hef tan... Sempla ray pe petra ? Raio ket... Met eur zac'had imor a zo enni, klevit kentoc'h :

— Penn foll ma z'out, amboubal, nouch divalo. Petra' peus graet laza Frankig eur c'hi ken karantezus all... Mont da lakaat Frankig er pod...

— Petra, Frankig !

— Met poaz eo, petra peus da lavaret ?

— Asa, asa, pebez den evelato !!! Mont da lakaat Frankig d'ober soubenn !

— Selaout houman an alvaon-man, met te da unan eo ez neuz lavaret d'in en ober imichans.

— Me... Me... Ro peoc'h, ginaouok sot ma zout !

— Ya te, te da unan, p'edon o vont kwit eus ar park az peuz lavaret d'in lakaat Frankig er pod, n'oun ket bouzar...

— Ya frankig a gig, frankig a farz, eur gount vraz a gig ha farz, n'eo ket hor c'hi bihan eo avat, tamm panezenn ma zout !!!

Ha me o sonjal betek hen em oa choazet da zimezi ar fina euz gwazed ar c'hanton... Fell ket d'in, la, chom da vev ken gant eur seurt glapezenn. (Difronka'ra.) Mont da lakaat chas d'ober soubenn... Heu ! Heu ! Mont a ran kwit la !


— Chom Janig... Chom... ne rin ket ken biken james. Me bromet dit... Hiviziken me jomo atao d'ober labour ar park hag a lezo ganez labour an ti... Me roio amzer d'it da aoza ar boued, ha ne glemmin morse eus ar boued a zervichi d'in.

— Sur eo Yannig ne laki ket ken da fri e labour an ti ?

— Ya, ya, sur eo.

— Mat, neuze e chomin... Pardonit ran d'it...

Arvor.



LABOUSIG AR GOANV

AR goañv e oa, kalet ha kriz, kriz dreist pep tra d'ar paour kaez laboused o klask o boued.

Deomp-ni bugale e oa brao beza er gêr, er gegin domm, ha Mamm o planta keuneud ha glaou forz pegement e-barz ar fornigell.

Kerkent ha ma vije echu debri hor pred e soñjemp-ni er paour kaez loened bihan. Dastum a raemp ar bruzun diwar an daol evit rei d'al labousedigou kaez.

Kustum e oant da zont bemdez war vordig hor prenestr ha ni, difiñv a-dreñv gwerenn ar prenestr, gant aon d'o sponta, a gare sellout outo o tiskraba hag o pipial en-dro d'an tammouigou bara.

Eun devez, ne oa ket war-lerc'h eur pred avat, e voemp didennet, va c'hoar ha me, gant eul labousig o klemm, astennet war vord ar prenestr. Gloazet e oa, hag e teue da glask diganeomp, anat.

« Henez a anavez an ti, eme hor mamm. Poan en deus en eun tu bennak digoromp ar prenestr da welet. »

Digaset e voe ar paour kaez loenig paour e-barz ar gegin domm. A boan ma fiñve e askell hag e bennig.

Digor frank e oa e zaoulagad avat, daoulagad ront ha bliou...

Sellet e voe outañ evel just, ha mamm ne voe ket pell o tizolei e pelec'h en doa droug : torret e oa e bao, siouaz !

Va zad-koz, a oa o veva ganeomp a reas eur seurt branell d'al labous gant eur vazig bihan en doa troc'het gant e gontell diouz ment gar al labousig.

Mamm a gemeras eun tamm lien neuze ha, gant neud ruz, oc'h astenn gant aked ar pao torret paket mat a-hed ar vazig, a liammas pep tra.

Röet e voe boued d'ar « fiñ » bihan hag hemañ, war hent ar pare diwar neuze, a nijas kuit laouen.

Ankounac'haet e voe an darvoud-se, pelloc'h, met, d'hor brasa souez, eun toullad miziou goudeze, piou weljomp' ta o skei gant e veg ouz gwerenn hor prenestr ? — Eul labousig, strobellet e bao gant eul lien, eun tamm neud ruz, hag eur vazig a ranke stleja e pep lec'h.

Deuet e oa, na petra ' ta, da lavarout deomp e oa pare bremañ, n'en devoa ket ezomm kien eus al lien nag eus ar vaz ha, mar plij, tenna ar re-se dioutañ.

An amzer vras a oa deut en-dro, tommik an heol ha klouar an avel, glasoc'h ar geot nevez, prestik e vije bleuniou. Tennet e voe d'ezañ.

Pipial a reas laouen, ha piklammat eur pennadig amzer, war vord ar prenestr. Ffu... Nijal a reas kuit a-denn askell ; abaoe ne voe mui gwelet o tont en dro du-mañ, marteze awalc'h ivez e tistroas c'hoaz nemet n'eo ket bet anavezet ganeomp diouz al laboused all, pa ne oa mui gantañ en dro d'e bao na neud ruz, na lien, na baz.

Kerlann (21-11-1951).

N'eus brasoc'h karantez...

(E brezoneg eeun)

YAOUANK c'hoaz e oa aet Rumont Kolbe da vanac'h. Eun deiz e reas e sonj kuitaat e Urz. Met neuze e teuas e vamm da gemenn dezañ e oa-hi hag he fried o vont d'o zro da lavarout kenavo d'ar bed.

Adal an amzer-se e reas an Tad Kolbe eus e wella evit sevel kazetennou dre ar bed-holl en enor d'ar Werc'hez. Ken ez eo bet graet anezañ : Foll an Itron Varia.

D'ar 17 a viz C'houevrer 1941, e teuas eur c'harr-tan dirak dor ar Fransiskaned, e Niepokalanov (Polonia). Tri Alaman a oa ennañ. Diskenn a rejont hag unan anezo skei war dor an ti. Eur Breur a zigoras dezo. — « An Tad Kolbe, mar plij. » Hemañ a zeuas. — « Meulet ra vezo Jezuz-Krist ! » emezañ. — « An Tad Kolbe ez oc'h-c'houi ? — Ya. — Mat, it dirazomp. »

Kaset e voe da Pawiak, eur prizon bras, kalz a dud ennañ dija. Eur wech, e teuas er gambr m'edo enni an Tad, unan eus mistri ar prizon. Pa welas eur sae-manac'h ez eas droug ruz ennañ. Paka 'reas an Tad dre e chapeled : « Krener, penn-fohl, pez-fall, lavar din : Ha kredi 'rez e Jezuz-Krist ? — Ya, kredi 'ran », a respontas-heñ, laouen. Gant e holl nerz e tistagas an Alaman gantañ eun taol-dourn war e zremm (fas). Ma santas an Tad blaz ar gwad en e c'henou.

« — Ha kredi 'rez c'hoaz ? — Ya sur, kredi 'ran. » Eun eil taol, hag unan all, hag unan all. — « Ha kredi 'rez atao ? — Ya, atao ! » Taoliou adarre. Koueza 'reas ar manac'h war an douar. An Alaman a ya dezañ a daoliou botou. Evel maro e chomas an Tad war al leur. E zremm ne denne mui da hini eun den. Neuze e redas kuit an den drouk.

Pa c'hellas sevel, e lavaras an Tad d'e gamaraded : « Bezit laouen ganin ; evit an eneoù eo, evit, ar Werc'hez Vari hep pec'hed ! »

D'an 28 a viz Mae, e voe kaset an Tad Kolbe da gamp gwall-vrudet Auschwitz. Eno e ranke labourat start, daoust d'e yec'hed fall : dougen, en eur redek, kefiou-gwez teo. Bep gwech ma koueze e veze skoet warnañ betek ma save. Met eun deiz ne c'hellas mui sevel. Kaset d'an ospital e tibabas al lec'h falla : e-kichen an nor ; met evel-se 'wele ar re varo o tremen hag e pede evito. E-pad an noz e kofesae ar re glañv. Dezo e roe ivez e voued.

D'an 30 a viz Gouere 1941, en em laeras eur prizoniad. Peogwir ne voe ket kavet en-dro, e voe dibabet dek den da veza kaset da gambr an naon, da c'hortoz o maro. Unan anezo en em glemme : « Petra ' zeuy da veza va maouez ha va fevar bugel. »

An Tad Kolbe a dostaas neuze ouz mestr ar c'hamp : « Va lezit da gemer lec'h unan eus an dud-se. — Piqu out-te ? — Eur beleg. — Pehini anezo e fell dit kemer e blas ? — Hennez hag en deus pevar bugel. — Perak ? — Koz oun ha mat da netra (47 bloaz ' oa). Hag heñ a zo yaouank, gant gwreg ha bugale. — Mat ! »

Setu an Tad Kolbe hag an nao brizoniad all serret e kambr an naon... hag ar sec'hed. Betek neuze, ne veze klevet eno nemet mouezioù evel re tud kousezet en ifern. Ar wech-mañ e klevet pedennou ha kan ; klemmou ivez, met malloz ebet.

Pemzek deiz goude, pa voe digoret an nor ne oa beo nemet an Tad. Lazet e voe gant eur bikadenn. Hag e chome evel kousket, e zremm sioul-kaer, sklerijennus... Devet ' voe an dek korf.

« N'eus brasoc'h karantez eget rei hor buhez evit hor mignon. » (Avel.)

K. Riou (13-9-51).



AR STROLLAD "MANER"

Evit Bretoned Pariz

AR strollad « Maner », bet savet e miz Here 1951, a gendalc'h gant an ero boule'het gant an aotronez beleien *Cadic*, *Goasmat* ha *Mauny*.

E vennad eo boda ha skocazella ar Vretoned a zo er gêr-benn, ha tro-war-dro, war dachenn ar relijion hag hini an darempredou mat.

Petra ra ?

— Dizelei, e pep karter, ar Vretoned reuzeudik.

— Mont d'o gwelet en o ziez hag en ospitalioù, evit o c'hennerzi, en dienez, ha, dreist pep tra, o jacha war hent an iliz. Evit eul labour ken pouezus oa ret tud a galon, ret oa ive, e vije eur beleg gredus d'o c'hentelia, eur beleg hag a anavesfe ar brezoneg.

Goude kalz poan int deuet a-benn da gaout an *Tad Moysan*, ginidik eus Bodilis, ha, breman, sekretour bras Urz misionerien ar Spered Santel, e Pariz.

Bep miz, ar strollad a en em vod evit pleustri asambles war an doareoù gwella da gas al labour war araok. E pep hini eus ar bodadegoù e klevet c'houez vat ar vro goz, gant eur zarmoun, e brezoneg ha gallek, sonerez biniou...

Komzet e vez eus ar c'heleier hag an traou breizek.

Ar strollad a denn, bep miz, eur gelaouennig, a zervich da liamm etre c'houec'h kant familh bennak.

Met sklêr eo ar pezh a ra ar muia vad d'hor c'henvroiz, kollet, er gêr-vras, eo ar vignoniaj a ziskouezer d'ezo. An doare sura da c'hounit o c'halonou eo komz d'ezo eus bro o c'havel.

E miz Meurs ez eus bet eun tammig gouel, gant eun abadenn blijadur, a zo bet kavet brao kenan.

Araok an eost, eur pardon bras, e Itron Varia Longpont, en deus klozet ar bloaz labour. Ar pardon-se en deus roet tro da galz kenvroiz d'en em welet.

Tomma kalon ar Vretoned dilezet, c'houeza war al ludu, a c'holo feiz o bugaleaj, pebez tra gaer ! Ar strollad « Maner » a boagn ouspenn, a unan gant kevredigez an Em zikour vreizek, da glask d'ezo labour, ha setu perak ar pezh a ra, a verit beza brudet, meulet hag harpet ganeomp holl.

Sekretouriez ar Strollad « Maner » a zo he jom-lec'h :

11, avenue Laumière, Paris (19°).

Ar pevar Leon hag eun Tad gwen

N'eus ket c'hoaz a vloaz eun den a c'houlennas ouz eun Tad Gwen :

— Va Zad, daoust hag en ho pro ar Soudan ez eus c'hoaz loaned gouez ?

— Ya, bez' eus leoned.

— Hag en em gavet oc'h bet gant unan bennak ?

— Nemeur a wech. Eun droez, koulskoude, em eus bet aon.

— Penaos an dra-ze ?

— N'eo ket hir va istor. Pedali a rean, dre eur venojenn, en eur brôus-koad, e kichen al lenn, pa welis dirazoun, nann eul leon, met pevar, astennet evel chas oc'h heolia a dreuz ar venojenn.

Diskenn a ran eus va velo. Nec'het oan. Eur revolver a oa warnon, met petra eur benveg ken dister evit diskar pevar bikol aneval evel ar re a oa dirazon. Petra da ober ? Foll oa tostaat ha tec'hout risklus.

Dindan va dourn, ouz korn va marc'h-houarn, ez oa a-istribilh eun drom-pilh, eur c'horn-boud. Great oa evit ober d'an dud war droad en em renka pa dremen ar velo. Ha daoust ar pevar babor-man eus ar c'hoad bras n'int ket evel an dud a ya war droad ?

Ha me c'houeza em c'horn-boud : Tu ! Tu ! Ar c'henta eus va bevar-kousker a astenn e skouarn, a zao e benn, a zell ouzin hag a c'hourvez adarre.

Ha me dao adarre ive ! Tu ! Tu ! Tu ! An eil a hej e lost hag a skub ar venojenn.

Eur wech c'hoaz : Tu ! Tu ! ha gant muioc'h a vouez ! An trede a zao en e zav, en em ziforfil, a zigor e c'henou, a zell ouzin a-bañ.

Boudal a ran heb ehan : Tu ! Tu !... Neuze ar pevare, eur mellad hini teo ha pounner, a finv en em laka war e skilfou hag hep teurveuzi ober eur zell ouzin, ez a gant e hent e dounder ar c'hoad.

Hen a dlîe beza ar mestr, rak an tri all a yeas d'e heul. Setu aze va istor.

— Eus a beleac'h oc'h, va Zad ?

— Eus an Hanter-Noz eus ar Frans.

— An dud a gredo ez oc'h eus Tarascon pe eus Marseilles.

— Evel ma karint koulskoude ar wirionez a zo ar wirionez.



An hini vez sot yaouank-flamm evit kosaat ne fura tamm.

Den fur a-barz ober netra a gemer kuzul da genta.

Roit d'ar fur bazadoù ha kredit e lavariou.

Boked Bleun-Brug Landreger

D IWAR ribl ster ar Gindy, e-lec'h m'emañ o pokat d'e c'hoar ar Yeody, o skoulma eur gouriz c'hlas da Landreger ouz troad Iliz Sant Tual he soniri dudius war vrall d'embann ar gouel dispar, e fell d'in kemer ma fluennig ha hopal da Vreiziz petra gaer am eus gwelet an deizioù tremenet : Breiz en he splannder, o pedi, o kana, oc'h ehati.

Eur bobl tud dirak an Iliz-veur ar sort n'eus nemeur, dastumet da welout displega ar vuhez santela, buhez splann an Aotrou Sant Erwan. Ha pa oa echu, ar bobl o vont e-leiz ar ruiou, gant goloioù, en eur gana a-bouez penn, ken ma skloke : « N'an eus ket en Breiz » da oferenn hanter-noz dirak iliz Sant Erwan, sklerijennet evel an oabl gant milieroù stered. E-leiz a dud o komunia, o tegemer en o c'halon Jezuz, o gwella mignon, hag a-us d'ezo, gant daoulagad ma feiz, me a wele Doue an Tad en' eur vorenn lugernus hag hen kleve o lavarout : « Ar Vretoned eo ma bugale muia-karet dirak ar Werc'hez ha Santez Anna ». Pegen kaer o gwelout o ont sioulk a-vagadou, ouz muzik ar c'hleier pounner ha skintin d'an oferenn-bred. Kaera oferenn-bred hounnez ! An holl dud o kana da heul mouezioù dispar kanerien Sant Jozeb Launou !

Eun dudi oa klevout an Tad Abad Colliot o veuli hon Breiz karet, he feiz, he yez, he spered, he c'halon, he c'hantikou, he c'hanaouennou, he fir'hirinajou, he gizioù santel, he gwiskamaneou ken faro, hec'h ebatou ken lirin ! Kalonou ar Zent eo melezour kalon Breiz.

Gwelet em eus, en eur ger, Breiz en he splannder, war an daoulin o pedi, o kana, ha bremañ e welan Breiz, anezi faro-faro, o vont dre ar ruiou da ehati da heul bombard ha biniou. Beç'h ha beç'h eo kemer « eun tamm hag eul lomm da zerc'hel an den en e blomm » ha hast-ha-hast d'ar park bras da welout an abadenn. Hag eno ebatou, jabadao ha kaniri hag e-leiz ar galon a zudi...

An heol avat a ziskenn paz-ha-paz eus an oabl glas. D'achui ar pardon e saver ar proesion ha n'eo ket hennez eo boked ar pardon ? Ha kaera proesion, kroazioù kaer, bannieloù bleunius, skeudennou santel da heul ar stroladou, eur c'hant bennak, a dremen gant kement a urz, o kana kantikou gant bombard ha biniou... Biken Iliz veur Sant Tual n'helllo loja ar sklabe dud-se ! Aotrou person Landreger, an Aotrou Plétan, eur mignon d'ar brezoneg a oa gant-se. En harp an iliz dantelezet, e skeud an tour uhel, eul levenn vras gant gouriz mogerennou bleuniet an tiez. Hag eno kaera Salud ar Zakramant. Em skouarn emañ c'hoaz evel eun ograou, evel trouz ar mor bras, an « Adoromp holl ». Hag eus an heol aour gant eur mous'hoarz dudius Jezuz a roe e garantezusa bennoz.

Evel an Aotrou Trec'hieu e gouelioù bras Plougastell, 1937, Aotrou Person Landreger en dije gallet sevel e vouez da hopal : « O Breiz, o Itron, sav war da dron. Sell da vugale dastumet war da galon. Sav ha kerz evel bed an amzerioù, bepred glan ha dinamm, divlamm ha didamall, kaer has splann ! »

Ha c'houi, Breiziz Goelo, Treger ha Leon, Kerne ha Gwened, difennit hon yez karet, yez ar Zent. Komzit, kanit, lennit, skrivit, deskit ar brezoneg ! Ha ra vezo ar Feiz ene hon Breiz ken santel, douar al lealded hag ar frankiz, douar ar Zent, douar Santez Anna, douar an Itron Varia ha bro splann an Aotrou Sant Erwan !

Eur mignon.

Anoioù kaer da rei d'ar bagou

(Kendalc'h)

<i>Mordan</i>	Phosphorescence marine.
<i>Mordrouz</i>	Bruit de mer.
<i>Morgadenn</i>	Seiche.
<i>Morvran</i>	Corbeau de mer.
<i>Moullég</i>	Pluvier, mullet (poisson).
<i>Mor Bras</i>	Océan (l').
<i>Mor Bihan</i>	Golfe du Morbihan.
<i>Mor Breiz, Mor..., etc.</i>	Manche (La), autres noms de mers...
<i>Menez C'homm, Menez..., etc.</i>	Menez-Hom et autres noms de sommets de Bretagne.
<i>Oriav</i>	Goéland.
<i>Ourlig-Mor</i>	Vaguelette.
<i>Ourmelenn</i>	Ormier, haliotide.
<i>Penn Ru (ou Du)</i>	Tête rouge (ou noire).
<i>Pastellek</i>	Rapetassé.
<i>Penn fall</i>	Mauvaise tête.
<i>Penn kalet</i>	Tête dure (têtu).
<i>Penn Sardin</i>	Tête de sardine. Surnom des gens de Douarnenez.
<i>Penn-Tir</i>	Cap, nommé à tort (<i>Penn-Hir</i>).
<i>Porz-Gwenn, Porz..., etc.</i>	Port blanc, et autres noms de ports...
<i>Plougastellenn</i>	Plougastelienn.
<i>Poc'hanig</i>	Oiseau, plongeon.
<i>Ran</i>	Grenouille.
<i>Reklomm</i>	Bourrasque.
<i>Rigadell</i> {	Glisseur.
<i>Rikler</i> {	
<i>Ruz-Reor</i>	Gratte-cul, trainard.
<i>Reder-Mor</i>	Coureur de mer.
<i>Ruzder-Beure</i>	Aurore.
<i>(Ar) Sacz (ou Ar Bir)</i>	La flèche.
<i>Sant Erwan</i>	Saint Yves.
<i>Santez Anna</i>	Sainte Anne.
<i>Sant... Santez</i>	Autres noms de Saints et de Saintes.
<i>Sao-Heol</i>	Lever du jour, Levant, Est.
<i>Steredenn-Vor</i>	Etoile du maria.
<i>Skraber-Dour</i>	Gratte-eau.
<i>Skravig-Gwenn</i>	Mouette.
<i>Skreo-Mor</i>	Éterlet.
<i>Silienn</i>	Anguille.
<i>Ster Aon, Ster..., etc.</i>	Rivière de l'Aulne, et autres noms de rivières.
<i>Stiogen ou</i> {	Pieuvre.
<i>Skourrpenn</i> {	
<i>Taer</i>	Audacieux, hardi.
<i>Tarz an De ou (Deiz)</i>	Pointe du jour.
<i>(An) Tarz</i>	La lame.
<i>Tiz d'ez (ou d'ei)</i>	Elle file !
<i>Unanik</i>	Seulet.

MEULGAN SULIOU AR BLOAZ ⁽¹⁾

O Tad, krouer ar Sklerijenn,
Ha diazezer pep lezenn,
A laouenaas deroù ar bed,
O rei dezañ lugern ho sked.

C'hwi 'zo fonnus ho madelez
A gasas c'hoaz d'har dasprèna
En amzerveziou diweza,
Ho Verb, ar sklerijenn nevez.

Lakit ennomp sklaerder ar feiz
Da ren oberoù hor buhez,
Ma vevimp muioc'h mui bemdez
En soñj eus hor peurbadelez. ⁽²⁾

En dra ma teu an noz garo
Da sila dre holl ar maro,
Hon mirit diouz ar pec'hed bras,
Kreskit ennomp lugern ho kras.

Hor selaouit Tad truezus,
Ha C'hwi e Vab karantezus,
A ren gant ar Spered Santel,
En heyelep klod ⁽³⁾ peurbadel.

Amen.

M. G.

(1) Meulgan : kan a veuleudi.

(2) Eternite.

(3) Gloar.



O SOLA MAGNUM URBUM

A Vetleem, ker vihana,
Deuet out da veza ar vrasa
Peogwir ennout eo bet ganet
Ar Mesiaz, Salver ar bed.

Hag en Neñv sterenn ar Roue
Splannoc'h he sked eget an heol
A ziskler da dud ar bed holl
Eo diskennet gwir vab Doue.

P'o deus e gavet, ar Vajed
Gant feiz ennañ, o deus stouet
En eur brofa madou Ofir
An aour, an ezans hag ar mir.

An aour a verk ez eo Roue
Fronn an ezans ez eo Doue
Ha gant ar mir eo diskouezet
E varvo evit tud ar bed.

'Vel ar Vajed profomp ivez
Da Jezuz aour ar garantez
Ezans ar gwir bedenn gristen
Ha mir c'houero ar binijenn.

Jezuz, mab Doue benniget
En em ziskouez d'an holl boblou
D'eoc'h ha d'an Tad ha d'ar Spered
Klod ⁽¹⁾ en amzer an amzeriou.

Amen.

(1) Klod = gloar.



MEULGAN NEDELEG ⁽¹⁾

Ne oa netra eus ar bed c'hoaz
M' edoc'h ouz an Tad a viskoaz
En hevelp peurbadelez, ⁽²⁾
En hevelep doueelez. ⁽³⁾

Mab unik ha skeudenn an Tad
C'hwi 'felle deoc'h en ho krad-vat
Dont da gemer ; evidomp-ni
Ur c'horf heñvel ouz hon hini.

Sofij a zigas dimp an deiz-mañ
Oc'h diskennet betek amañ
Da veza hor sklaerder en noz
Hag hon hent meur d'ar baradoz.

Setu perak er veuleudi
Douar ha mor, gant an Aeles,
Ho kanomp holl a vouez nevez,
O Salver deut d'hon nevezi.

Evit deiz ho kinivelez
E tridomp holl a galon drant,
O veza bet er vadeziant
Ganet ennoc'h d'ar wir vuhez.

Jezuz, Mab Doue benniget,
Deut da vezâ Mab ar Werc'hez,
Deoc'h ha d'an Tad ha d'ar Spered,
Enor en holl beurbadelez.

Amen.

M. G.

(1) Meulgan : kan a veuleudi.

(2) Eternite.

(3) Divinite.